

Roll Frañs hag UE er bed

Frañs hag Unaniezh Europa, ul levezon war ar bed, galloudegezh diachu

I. Frañs hag he levezon àr ar bed

Un DROM(Departamant ha rannvro tramor): diazez bezañs Frañs er bed a-bezh

Gwadaloup

Un enezenn en **Antilhez c'hall er C'haraibez**

Poblañs: 405 500 annezad

Get Martinik e kemer perzh Gwadaloup e **sked Frañs** e takad Karaibez get:

- **Ur bezañs soudardel** get bon-arme staliet ha nerzhioù-arme é labourat evit an ONU (Haiti)
- **Ur bezañs sevenadurel** get liseoù gall e Haiti , San Salvador... hag ivez Stadoù ezel ag an **OIF(Aozadur Etrevroadel ar gallegañ)** evit labourat àr ar yezh, ar galleg ha talvoudoù(peoc'h, demokratelezh, DD)
- **Ur bezañs ekonomikel:** an touristelezh kaset àr-raok get un aerborzh etrevroadel e Pointe-à-Pitre(Gwadaloup)

Ur levezon àr ar bed

- Tiriadoù tramor àr bep kevandir hag pep meurvor
- **Un takad ekonomikel miret divent** (takad mor, betek 200 miltir ag an aodoù(370 kilometr) a chom edan gwir korvoiñ nemetañ ur Stad(ZEE):an Eil galloud-mor er bed.
- **Bon-arme àr bep meurvor.**

Ur galloudegezh politikel: an eil rouedad diplomated er bed

- Ur galloudegezh **nukleel**
- **Ezel a aozadurioù etrevroadel pennañ**(ONU, FMI, Kuzul Sutentez an ONU, OMC Aozadur etrevroadel evit ar C'henwerzh)
- Liammoù get Afrika(skoazell evit an diorren)

Ur sked sevenadurel àr bep kevandir dre he yezh:

- **Ar gallegañ:** levezon sevenadurel 220 million a dud a ouia gomz galleg er bed; yezh ofisiel an ONU hag ar c'hoarioù olimpek
- Ar sevenadur gall kaset àr-raok get ar glad, ar sinema, ar gastronomiezh, al lennegezh, doare-beviñ Frañs
- Ar gallegañ zo 75 Stad strollet **en OIF(Aozadur etrevroadel ar gallegañ)** sikouret get ar mediaoù(TV5 ,France 24)hag ar liseoù gall en estrenvro.

Met ul levezon é tigresk:

- **Kevezerezh get ar SUA** hag ar Stadoù é **tiflukiñ(àr askoriñ)**
- Àr-gil e ya ar gallegañ dirak ar **patrom sevenadurel anglo-sakson.**

II. Galloudegezh ha bevennoù an Unvaniezh Europa

Sked an UE:

- **7 Stad a** c'houlenn mont e-barzh UE
- **Eskemmoù get he amezeien:** kenwerzh, un douar enbroñ, touristelevh...
- **Emglevioù :** politikerezh Europa an amezegzh: kroget e 2004, pal ar politikerezh-se eo gwellaat an darempredoù etre an UE hag hec'h amezeien ha n'emaint ket e soñj mont e-barzh UE.
- **UI levezon sevenadurel a zifenn** an demokratelevh ha doujiñ gwirioù mab-den

Ur galloudegezh etrevroadel:

- **ur pol-bed:** kentañ galloudegezh ekonomikel er bed : 25% a PDG ar bed dirak SUA ha Sina
- **Kentañ galloudegezh kenwerzh:** 40% ag ar c'henwerzh etrevroadel
- **Kentañ gallougezh labour-douar, industri ha servijoù ivez.**
- **Ur galloudegezh arc'hantourel:** roll an euro,
- **Kentañ pol touristelevh er bed.**

Bevennoù d'he galloudegezh:

- **Disemglevioù da gomz a-unvouezh:** roll diplomatek bevennet
- **Peseurt identitelevh** sevel àr-lerc'h bout degemeret meur a vro nevez
- **Enkadenn arc'hantourel** abaoe 2008: euro, dle ar Stadoù ezel èl Bro C'hres
- **Kevezerezh etre ar meugêrioù-bed** èl Londrez, Pariz, Rotterdam, Frankfurt
- **Stadoù ar Su hag ar Reter** a chom get diaesterioù (dilabour, dle)